

Houarnek (Hervé Louis Joseph) (Sant-Gregori 1899 - Gwezani 1973)
Bet embannet e 1902.

Taolenn

Bez fur !

Anken ha levez.

Ar himiad diweza.

Bez fur

« Lavar din, mamm, daoust piou e vefent,
An dud a welis, kaer divent,
En on iliz uhel-savet,
En o daouarn bodou bleunvet ? »
« Ar re-ze, gwisket ker skeduz,
Eo ar zent, mignoned Jezuz.
Bez fur, va mab, hag az-pezo
Leun a draou kaer eveldezo¹. »

« Mar gouezfes peger kaer e oant
Gand o zaeou gwenn-kann, ker koant,
Stered alaouret warnezo
Ha tro-war-dro dantelezo'.
Va mamm, va mamm, mar am harez,
Eur zae evel-se din a rofez. »
« Bez fur, va mab, hag az-pezo
Eur zae wenn-kann eveldezo. »

« En-dro d'o fenn, ya, tro-war-dro,
E oa leun-leun, leun a vleuniou ;
Euz ar bleuniou-ze en or bro
Biskoaz me ne welis al liou.
Va mamm gêz, da beleh ez in
Da gutuill bleuniou ken lirzin ? »
« Bez fur, va mab, hag az-pezo
Bleuniou lirzin eveldezo. »

« O fenn a oa laouen d'ar zent
Hag oll ouzin e vousec'hoarzent,
Ha, seul-vui e sellen outo,
Seul laouennoh e teuent atao.
Penaoz, va mamm, penaoz mired
Eul levenez ken didorret² ? »
« Bez fur, va mab, hag az-pezo
Eun tal laouen eveldezo. »

« Ar re-ze 'oa savet uhel
Ha pep tra dezo a oa a-wel ;
Dre douez an dud, bihannig,
Me n'hellen gweled netraig.
Va mamm, daoust petra din d'ober
Evid kaoud eur skabell ker kaer ? »
« Bez fur, va mab, hag az-pezo
Skabell en neñv tostig dezo. »

¹ eveldezo : evelto.

² didorret : didorruz.

Anken ha levez

En iliz parrez e son ar hleier ;
N'o hlevit-hu, mamm baour an daelou ?
Ar boud anezo, dre al lanneier,
A zo dougenet³ war an avelou.

Kleier ar maro, nann ! n'hellont beza,
Pa zonont ken flour, pa zonont ken taer.
Kleier ar vuhez, avad, o tiñsa,
Kloh al levez bremañ a glever.

Nemed levez n'hellont da zeni
Rag ho pugelig en neñv 'zo pignet ;
Dreist an oabl glaz, 'n heol o lugerni
Ha dreist ar stered eo bet dougenet.

Sae wenn ar vadiziant, kaer dezañ gwisket
War barlenn ho mamm, emañ en Neñvou,
En-dro d'e bennig e vleo dispaket
Hag eur gurunenn en e zornigou.

Mamm gristen, tavit hoh huanadou ;
Dond a ray e viot en e gichennig !
Bez trist re bell ha skuilla daelou
'Zo dizelienna e gurunennig.

³ dougenet : douget.

Ar himiad diweza

Evnigou tremenidi⁴, plijit, a-denn-askell
Treuzi koummou ar mor glaz ha mond da Vreiz-Izel
Da gas da va bro garet, ar vro ar skedusa,
Da va herent en daelou, va himiad diweza.

Kuitaet em-eus Breiz-Izel, pa nevesae pep tra,
Pa gemere ar bleuniou o liou ar haerra,
Hag a bep tu pa skuille heol Mae sklêrder ha gor,
Em-eus laret kenavo da vo bro⁵ ger Arvor.

Livirit on degouezet e bro ar yenienn ;
E-touez ar ouezidi, va halon 'zo laouen ;
Ankeniuz em-eus kavet ha tenn an disparti,
Mouez Doue eo bet ar greñva, sentet em-eus outi.

Livirit da va breudeur, da va mamm, da va zad
Ra zehint, mar am haront, daelou o daoulagad.
Va lodenn eo ar wella : Doue 'zo madelezuz
Da va beza dibabet da gannad da Jezuz.

Mar am gwelit, evnigou, o tremen e pell bro,
Arabad deoh diskuilla ar vrud euz va maro !
Richanit flour d'am herent ha livirit, evned,
Er baradoz e vezim da viken unanet.

Nijit, labousedigou, etrezeg tud va zi ;
Kluchit war gwez on liorz, kanit d'o frealzi.
En neñv, en neñv, livirit d'am breudeur, mamm ha tad,
A-benn nebeud e vezim unanet evid mad.

Neuze kimiad ebed ken ! 'hed an oll amzeriou,
Ni a vezo eüruz dindan sell on Aotrou.
Evid ankeniou dister hag eun disparti berr,
Ni 'vezo el levenez, oll 'hed an oll amzer.

Nijit ivez evidon da iliz va farrez,
En ho yez grit eur bedenn da Vari, va gwarez,
Evid ma plijo ganti teuler euz barr an neñv
Warnon eur zell truezuz am gray nerzuz ha kreñv.

Livirit d'am mignoned, pa deu trist va halon,
Pa vez an dristidigez o klask plava warnon,
E knana d'am frealzi ar haerrañ kantikou
A ganem oll gwechallig, da zeiziou or paskou.

Nijit, labousedigou, bremañ gand va bennoz !
Ra gavoh eun êzennig d'ho tougen deiz-ha-noz !

⁴ Evnigou tremenidi : Evnigou o tremen.

⁵ kenavo da vo bro : ereadurez ar galleg.

Nijellit da Vreiz-Izel, ar vro ar skedusa,
Gand va gwella mennoziou, va himiad diweza.